

IVONA MARZHIN
MILITANTE,
AUTRICE, SECRÉTAIRE
STOURMEREZ,
SKRIVAGNEREZ, SEKRETOUREZ
(1907- 2005)



IVONA MARZHIN
MILITANTE,
AUTRICE, SECRÉTAIRE
STOURMEREZ,
SKRIVAGNEREZ, SEKRETOUREZ
(1907- 2005)

Ganet eo Ivona Marzhin d'an 23 a viz Gwengolo 1907 e Sant-Mark (Brest). Brezhonegerien e oa he zud, met rankout a reas deskiñ ar yezh endro dre ma ne oa ket bet savet e brezhoneg moarvat dre ma oa he ziegezh o chom e kêr. Dedennet tre eo abred gant ar brezhoneg.

Gant Roparz Hemon he deus kejet war-dro 1930, sammet gant e labour, he doa kinniget dezhañ he skoazell. Nebeut war-lerc'h e sikouras hi d'ober war-dro ar gelaouenn "Gwalarn", er memes koulz hag hi labour en tiez bank. Ur vignoniezh vras hag ur c'henlabour daou-ugent vloaz a groge. Goude ar brezel e reas war-dro sekretouriezh ar gelaouenn Ar Bed Keltiek. Skriverezañ a reas evel-se miliadoù a bajennadoù, a veze moulet goude-se gant ar beleg Jakez Ducamp. Dindan añv-bluenn Barba Ivinek e skrivas Ivona danevelloù er gazetenn Arvor hag e-barzh Al Liamm. Koulskoude, n'he deus ket skrivet kement ha ma c'hellfed krediñ. Ur stourmerez e oa da gentañ-penn. Unan eus reizherion Skol Ober krouet e 1932 e oa ivez.

E buhez Oaled Sant Erwan Brest e kemeras perzh adalek 1969, kadoriadez e oa bet adalek 1989 hag e-pad daouzek vloaz. Kemeret he deus perzh ivez er stourmadenn da gaout un Oferenn vrezhonek e Brest. Mignonez da Anjela Duval, kalonekaat a reas anezhiñ da skrivañ hag embann e brezhoneg.

E 1995 e voe roet Kolier an Erminig dezhi en abeg d'he labour evit ar brezhoneg.

D'ar Meurzh 8 a viz C'hwevrer 2005 ez eo aet Ivona Martin d'an Anaon.

Ivona Marzhin (Ivona Martin) naît le 23 septembre 1907 à Saint-Marc (Brest). Bien que ses parents parlaient breton, elle est élevée en français, probablement parce que sa famille vivait en ville. Elle s'intéresse dès sa jeunesse à la langue bretonne.

Dans les années 1930, elle fait la rencontre de Roparz Hemon, directeur de la revue mensuelle Ar Bed Keltiek, à qui elle propose son aide afin de travailler avec lui pour la revue « Gwalarn ». Elle devient, parallèlement à sa carrière professionnelle dans la banque, secrétaire de la revue. C'est alors que débute une collaboration et une amitié qui durera 40ans. Après la guerre, Ivona travaillera également pour la revue Ar Bed Keltiek et dactylographia des milliers de pages imprimées par la suite par le prêtre Jakez Ducamp. Sous le nom de plume de Barba Ivinek, elle a également fait paraître des nouvelles dans le journal Arvor et la revue Al Liamm. Toutefois, elle était militante avant d'être autrice. Elle a été enseignante au cours de breton par correspondance Skol Ober, fondé en 1932.

A partir de 1969, elle participe à la vie de Oaled Sant Erwan Brest et le dirige de 1989 à 2001. Parallèlement, elle lutte pour la messe en breton à Brest. Amie d'Añjela Duval, elle l'encourage à écrire en langue bretonne et à publier ses œuvres.

Elle a reçu le Collier de l'Herminie en 1995 à Guérande pour son travail pour la langue bretonne.

Ivona Marzhin décède le 8 février 2005.